

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

71. (BOSENN PLOUESKAD)

Plouescadis zo rentet trist
 Gant greg eur c'heré a Lochrist
 E deuz digasset ar vossen
 En eur bossat neut en e barlen.

 E Plouescat er blassen varc'hat
 E cafet ar yaot da falc'hat
 Nement en entré bian dar c'har
 da gaç ar c'horffou d'an douar.

 Leun an ilis beteg an treuziou
 hag ar veret beteg ar muriou
 Ret eo benizien ar parc bras
 Do lacat oll bian a bras.

 E Plouescat né vé quet cavet
 Eur paotric da zivoal an dévet
 Nement eur paot trivac'h vloaz
 Goret ar vossen en é scoaz.

vvvvvvvv

(Sell. ouzh Miorcec de Kerdanet, Vies des Saints de Bretagne, 1837, p. 166, o reiñ an droidigezh ger erit ger eus an destenn-mañ.)